

Guevroc (sant.)
CANTIC DA SANT GUEVROC

PATRON PARREZ LANNEUVRET (1)

Da c'houlen grassou ar Mission.

Autrou sant Guévroc, mignon bras da Jesus,
Pedit evidomp, Patron carantezus,
Grit ma recevimp oll ac a greis calon,
Grass ar Mission.

Evid on tud coz gueichall oh eus pedet,
Ha grêt, evito, pinijennou calet ;
Eus gloar an Envou, taulit varnomp ivez
Ur sell a druez.

Touellet, siouas ! gant plijadurezou,
Madou ar bed-mâ, ac e follenteziou,
Dibaot e sonjomp en or silvidig'ez,
Ac er guir vuez.

Grit ma tigorimp erfin on daoulagad
Ha ma tistroïmp ous Doue or guir Dad ;
Grit na zizonjimp, nac en deis nac en noz
Gloar ar Baradoz.

Grit deomp diskenn doun en or c'houstiansou,
Ha, dre ar glac'har, ar c'heus d'or pec'hejou,
Eus or c'halonou, evel gant un alar,
Troït an douar.

Ac en on touez, pa devio an Tadou,
Grit ma silaouimp piz o frezeg'ennou ;
En or c'halonou e tiskenko neuze
Peoc'h ha grass Doue.

Gloar d'an tri Ferson eus an Dreindet Santel :
Da Zoue an Tad ha d'e Vab eternal,
D'ar Speret-Santel : o zri un Doue ebken,
Gloar da virviken.

PERMIS D'IMPRIMER.

Quimper, le 2 Novembre 1886.

A. SERRÉ, Vic. Gén.

(1) Anvet da g'enta : LAN-GVÉVREC pe LAN-GVEVROC.